

An DVD “Daet eo genin !”

---



Teuliad-kelaouiñ

## Taolenn

Prezantiñ.....	3
Istor ar raktres.....	4
Ar bare.....	6
Ar sifroù.....	10
Skigniñ.....	10
Monet e darempred geneomp.....	10

## Prezantiñ

Kinnig a ra Kerlenn Sten Kidna amañ ur benveg nevez evit monet àr-raok get ar yezh. E bal pennañ a zo **gwellaat ar c'hompren** dre selaou.

An DVD-mañ a vo talvoudus da razh an deskidi **adalek al live A2** (Portfolio DAO), betek ar re a zo en o aez get ar yezh, tud al live C2 da skouer.

Talvoudus eo kerkoulz evit an dud a zo é teskiñ **en o unan** hag evit ar re a heuilh kentelioù-noz. Ur benveg a-feson e c'hell bout ivez evit al labour **a-stroll**.

15 tem a-zivout ar vuhez a-vremañ, tri stumm evit pep hini (A2, B2, C2), **45 video disañval** en holl enta ha **88 min. da selaou** ;

- enrollet get tud a veur a dachad a Vro Gwened ;
- 7 poelladenn evit pep live, 315 en holl ;
- testennoù ar c'haozioù get notennoù àr ar c'heriaoueg ;
- etrefas brezhoneg-galleg ; videoioù, poelladennoù ha testennoù e brezhoneg hepen.



## Istor ar raktres

### Hañv 2007

Ganet eo ar soñj ha kaset dirak kuzul-meriñ Kerlenn Sten Kidna.

### 2007-2008

- Degemeret eo ar raktres get ar c'huzul-meriñ.
- Patrig a grog da sevel an testennoù. 20 tem (60 testenn) a zo bet rakwelet.
- Klask kuzulioù àr an doare da skriv (Daniel an Doujet, François Louis).

### 2008-2009

- Olivier a zo daet er bare (barregezhioù nevez a-fet tresiñ, a-fet urzhiatarezh).
- Adlenn ha formatiñ an testennoù. 15 tem hepken (45 testenn) a vo dalc'het.
- Sevel ha dibab stumm ar poelladennoù/teknologiezh.
- Marc'had get an embregerezh *A wel drem prod* (Ploue) : filmiñ, sevel an DVD-Rom.
- Sevel un teuliad : kinnig an danvez, displeg munudoù ar raktres...
- Darempredoù kentañ get Coop Breizh a-fet gwerzhiñ.
- Klask an harpoù a-fet argant hag a-fet pedagogiezh.

### 2009-2010

- Ronan a zo daet er bare (barregezhioù nevez a-fet sell àr an doare da skriv).
- Derc'hel get al labour « teknik » àr an testennoù : kontiñ ha dibab ar gerioù hag an troiennoù (pinvidikaat), dibaboù a-fet doare da skriv.
- Sevel poelladennoù an temoù 1 da 7.
- Dibab an aktourion ; monet e darempred get pep unan anezhe.
- Diwezhañ kempenn d'an testennoù get an aktourion.
- Lakaat an holl testennoù àr gKarafun (*prompteur*).
- Filmiñ an temoù kentañ.

## 2010-2011

- Achu filmiñ.
- Sevel poelladennoù an temoù 8 da 10.
- Sevel an danvez da splannaat geriaoueg an testennoù (piktoioù, skeudennoù, notennoù).
- Achu adlenn an holl destennoù hag o c'hempenn hervez liv an enrolladenn.
- Sevel ar boelladenn 1b (poelladenn fonetek) get Erwan Le Pipec.
- Sevel ar pennadoù (e brezhoneg hag e galleg) a vo lakaet en DVD : raklavar an aozerion, displegadennoù ar poelladennoù, penaos labourat get ar benveg.
- Sevel (Olivier) etrefas ha korf-eskern an DVD.
- Bourdet eo ar raktres adalek fin Gwengolo 2010.
- Meurzh 2011 : Daniel hag ar c'huzul-meriñ a c'houlenn get David kemer penn ar raktres evit klask adskoulmiñ al labour.

## 2011-2012

- Sevel poelladennoù an temoù 11 da 15.
- Adlenn an holl testennoù ha poelladennoù get David, Ronan ha Patrick.
- Kalañ-goañv 2011 : kuzul-meriñ ar Gerlenn a ziviz gober kondision doc'h Anne-Maëlle Le Roux evit kas da benn al labour ar an dachenn teknik.
- Dibenn 2011 : roet eo razh an danvez da Anne-Maëlle, savet ur c'halañfider, divizet un doare d'en em zaremprediñ ha frammet ar skipailh evit respont d'an ezhommoù ha sikour get an aozourez ; Olivier a sav da vat razh an danvez treset (botonioù, biroù...) rekis evit an holl skrammoù ha framm an DVD a-bezh.
- Genver-Mae 2012 : David ha Ronan a sikour embarzhiñ an testennoù hag ar poelladennoù er stumm XML ; Daniel ha Patrick a gontrol ar poelladennoù ; David a greizenn al labour... Tu a zo heuliñ al labour en linenn ha gwelet an traoù é vonet ar-raok.
- Adwelet eo an holl enrolladennoù get Jean-Marie Olivier (evit ar son) ha get Eric Gudenkauf (evit stumm ar videoioù).
- Ebrel 2012 : diskouezet eo ar version Beta da guzul meriñ ar Gerlenn.
- Mae 2012 : diwezhañ dibaboù skritur ; reizhadennoù diwezhañ ; hañvalaet ment son ar videoioù hag ar fichennaouegoù mp3 get David ;

daremprediñ Coop Breizh evit bout an elfennoù grafek a faote lakaat àr ar pakaj.

- 9 a Vezheven 2012 : diskouezet eo an eil version Beta d'an aktourion.
  - Mezheven 2012 : adlenn diwezhañ evit ar pennadoù "Stagadennoù" hag "A-raok krogiañ" get Daniel ; reizhet son videoioù zo.
  - Mezheven-Gouere 2012 : darempredoù get Erwan Le Pipec a-ziàr ar boelladenn fonetek ; eskemmoù àr ar c'hinnigoù pakaj ; sevel an teuliad-kelaouiñ.
  - Gouere-Eost 2012 : meur a dest diàr stummoù engravet ha gwelladennoù diwezhañ ; labour àr stumm ar videoioù da aesaat o lenn get razh an urzhiataerioù.
  - Eost 2012 c'hoazh : darempredoù get an uzin (rakpriz ha diferasionoù teknik), astenn d'ar fichennaouegoù grafek evit ar pakaj hag eunat an tresadennoù kentañ ; darempredoù get Coop Breizh.
  - 12 a viz Gwenholo 2012 : kasadenn ar master d'an uzin.
  - Gwenholo 2012 : klokaat an teuliad-kelaouiñ hag aoziañ ar bruderezh.
- 4 a viz Here 2012 : arru eo an DVD nevez !**
- 

## Ar bare



### **Daniel Carré**

65 blez

Doktor àr ar studioù keltiek (Roazhon II)

Bet kelenour sertifiet brezhoneg hag istor-geografiezh

Bet Stummour IUFM (pedagogiezh ar brezhoneg en eil derez)

Bet karget a gentelioù brezhoneg e skol-veur Roazhon II

ha skol-veur an Oriant

Bet e-karg ag ar c'helenn brezhoneg hag e brezhoneg e akademiezh Roazhon (eil derez)

Monitour skol-noz (Kerlenn Sten Kidna) abaoe 1985

Kenlabour e-ser DAO (strollad an amprouadennoù) abaoe 2005

### ■ **Kargoù er raktres**

Penn ar raktres betak 2011 :

- Meizadenn ar raktres

- Sevel ar poelladennoù hag an displegadennnoù en div yezh

- Adlabourat an testennoù (eil sell)
- Klask ar skoazelloù argant (teuliadoù, darempredoù)
- Klask ar skoazelloù pedagogel (teuliadoù, darempredoù)
- Darempredoù get an aktourion
- Heuliiñ ar filmiñ
- Skeudennoù implijet evit spisaat geriaoueg an testennoù

#### ■ **Barregezhioù**

- Pedagogiezh
- Brezhoneg
- ha galleg

#### ■ **Desket e-ser gober**

- Sentiñ da redioù an teknologiezh
- Treiñ ag ur yezh d'an all (tapet ampartiz)



### **David ar Rouz**

34 blez

Troour, danvez doktor àr skiantoù al lavar

#### ■ **Kargoù er raktres**

Penn ar raktres a-c'houde Meurzh 2011 :

- Darempredoù get an deknikourion, ar Gerlenn hag er bare
- Rakwelet, aoziiñ hag heuliiñ al labour
- Kas an emvodoù ha sevel ar rentañ-kont anezhe
- Eiliñ an testennoù ha poelladennoù e XML
- Adlenn an DVD en e stumm diwezhañ
- Gober àr-dro ingaliñ ar fichennaouegoù video ha son
- Rakwelet hag aoziiñ gwerzh ha bruderezh ar bladenn achu

#### ■ **Barregezhioù**

- Galleg ha brezhoneg
- Adlenn ha skriviñ
- Kas raktresoù, aoziiñ ha kehentiñ
- Brudiñ
- Stlenn evit an troiñ (TAO), ar burev hag ar web (HTML)

#### ■ **Desket e-ser gober**

- Kalz brezhoneg
- Darempredoù (get an deknikerion)
- XML, tretiñ ar videoioù hag ar fichennaouegoù son, Google Docs



### **Patrick Dréan**

35 blez

Stummour àr ar brezhoneg

#### ■ ***Kargoù er raktres***

- Skriviñ ar 45 testenn da vout lâret
- Dibab gerioù ha troiennoù (pinvidikaat an testennoù)
- Sikour get an aktourion doujiñ d'an testennoù a-orin
- Adlenn meur a wezh razh an testennoù ha poelladennoù

#### ■ ***Barregezhioù***

- Brezhoneg ha galleg
- Skriviñ
- Adlenn
- Ijiniñ poelladennoù

#### ■ ***Desket e-ser gober***

- Google Docs
- Labourat en ur skipailh
- En em soñjal àr ar yezh



### **Ronan Stéphan**

31 blez

Kenurzhior

#### ■ ***Kargoù er raktres***

- Sikour get an aktourion doujiñ d'an testennoù a-orin
- Adlenn meur a wezh ar fichennaouegoù orin hag o reizhiñ
- Bet é klask tud d'ober àr-dro ar programiñ
- Sikour diviz àr ar skritur
- Eiliñ an testennoù ha poelladennoù e XML

#### ■ ***Barregezhioù***

- Brezhoneg ha galleg
- Adlenn

#### ■ ***Desket e-ser gober***

- Klask pourchaserion servijoù





### **Olivier Berson**

32 blez

Stummour àr ar brezhoneg, tresour

■ ***Kargoù er raktres***

- Sevel en-dro grafek an DVD (skeudennoù, piktogrammoù, boutonioù h. c'h.)
- Sevel golo an DVD

■ ***Barregezhioù***

- Brezhoneg ha galleg
- Graferezh

■ ***Desket e-ser gober***

- Sevel un etrefas grafek



### **Anne-Maëlle ar Rouz**

23 blez

Krouerez dalc'hadoù liesvedia

■ ***Kargoù er raktres***

- Sevel an arload Flash
- Lakaat an tresadennoù a-barzh

■ ***Barregezhioù***

- Kodiñ (ActionScript 3, XML)
- Graferezh

■ ***Desket e-ser gober***

- Kod anavet gwell
- Kas ur raktres da benn
- Darempredoù pourchasour-kliant

## Ar sifroù

- 15 tem a-ziâr ar vuhez a-vremañ
- 3 live, 45 video
- 7 sort poelladenn, 315 poelladenn en holl
- 88 munutenn da selaou
- 69 252 c'her = 221 follenn er poelladennoù
- 18 043 ger = 56 follenn en testennoù ha notennoù
- 7 869 ger = 25 follenn displegadennnoù en div yezh
- 2 670 linenn kod ActionScript
- Kantadoù a euriadoù labour a-vat
- Muioc'h evit 14 emvod etre 2009 ha 2012
- Muioc'h evit 9 000 ger ha 35 follenn a rentañ-kont etre Meurzh 2011 ha Mezheven 2012
- Muioc'h evit 1 600 postel eskemmet (David) ; 1 000 (Daniel)

## Skignañ

An DVD a c'hell bout prenet àr-eeun get Kerlenn Sten Kidna, <http://www.kerlenn-sten-kidna.com>.

Kas ur chekenn a **20 €** d'ar 6 ru Joseph Rollo - 56400 AN ALRE. Ar frejoù kas a vo profet evit lañsiñ ar produ.

Kavet e vo ivez pe goulennet e c'hell bout e kement stal levroù a zo, kar skignet eo get Coop Breizh, <http://www.coop-breizh.fr>, Kerangwenn, 29540 SPEIED.

## Monet e darempred geneomp

C'hoant 'peus da ouiet hiroc'h ? N'hellit ket gortoz a-benn atersiñ izili ar bare he deus kaset ar raktres brav ha nevez-se da benn ? Dait e darempred geneomp !

David : 02 56 54 24 38 pe 06 37 15 49 71,  
[david@trohadistro.com](mailto:david@trohadistro.com)

---

**Evit gouiet hiroc'h :**

[http://www.kerlenn-sten-kidna.com/?page\\_id=1854](http://www.kerlenn-sten-kidna.com/?page_id=1854).



Skipailh an DVD hag ul lodenn ag an aktourien  
(*Luc'hskeudenn get Samuel Rattoray*)



Savet eo bet ar produ-se get sikour Rannvro Breizh, Kuzul-meur Morbihan hag ar c'hannad Michel Grall.

